



CONVERSION SANT AUGUSTINUS

Var an ton ancien.

LUSER hac henor ar bastoret,
Ha sclêrijen an oll Doctoret,
Tensor a savantis, menez a santeles,
Exempl a binijen hac a sempladures,
Grit din sclêramant compren
An nerz a c'hrag Doue o trec'hi calon an den!

Sant Augustin, henor an Afriq,
Piller bras an Ilis Catholic,
Disget din ped effort oc'h eus bet da ober
Evit chanch ha terri o chadennou ponner,
Comzit ouzin, car men a souhet
Dilezel ar viçou, renonç a gren d'ar pec'het.

Allas! pec'her, me voa c'hoas bug'el
Pa gommancis Doue dilezel
Evit choas mignonet, tud savant da bec'hi,
Ha c'hoas e caven gloar o tonet d'o zreti;
Em yaouançis n'em boa qen Doue
Nemet ar blijadur, ar bed hac ar vanite.

Guechal pa velen an actourien,

49. 4. 19. 2110



Dre gamzou, dre feñonniou monden,
Och ofr vañ an theatr ar poesson danjerus
Demeus ar plijadur hac ar viçou mezus,
Me santç va c'halon attaqet
Gant an deziriou fall hac ar goal vignonet.

Va zalanchou caes hac admirabl
Ne rent nemet va renta coupabl';
Qenlies pas a ren e sonjen gant glac'har
Penos ne ren netra evit gonit ar gloar;
Me a rê, et lezen din va-unan e
Ar veen hep frons mas troc bet ha stringet en fan.

Pet guech ne voan-me get supliet
Gant va mam da guitat ar pechet!
Mes me voarec'ha superb evit oboissa,
Re e plije din c'hoarzin evit c'hoantat goela:
C'ynsrou baos va mam hac e daerou
A peche va sprat eb terri va chadennou.

Doue, mad en andret ar peç'her,
Ha specialamant em c'hever,
Daoues d'an albaris, huot, ledan ha don,
A gavas ar secret da b'icat va c'halon;
Cæc'ha em boa c'usa va feç'hejou,
Gant ar vez me ruve pa sonjen em disurjou.

Doue carantezus, a speret
A sarmone din en peb momet:
Augustin, poentios chanch ha quittat ar viçou;

Poent eo, va bug'el ges, pratica ar vertutou ;
 Mes allas ! allas ! na ren estim ebet,
 Me voa bepret bouzar pa na c'houlen get clevet.

Piou so bet qen glac'haret biscoas

Evel va mam ges, p'am goelas

O redet d'enem gol en creis an drompleson

• Demeus ar c'hrimou vil, ha contret da reton ;

He c'halon gant glac'har a ianno,

D'e daerou e clean silvidigez va ene.

Caer em boa clasq ar gostantantant,

Oc'h heuill en peb tra va goal banchant ;

Rac er memes istant mac'h offancén Doué,

E santen va c'halon tourmantet a neve,

Va speret accablet gant ar boan,

E voen boureo, tirant ha suplis din va-unan.

Squis o vea qen mestroniet

Gant an appetijou direglet,

Men a essee terri va goal habitujou,

Mes prest me a squise e combati ar vigou ;

Allas ! n'em boa nemet anter c'hoant

Da renons d'ar pec'het evit bea penitant.

Ar cher vad ar c'hamaradou,

Qercouls hac ar blijadurejou,

Evit va abusi, oll ouzin e crient :

Augustin, Augustin, collet eo da scient,

Mar fel dit renons d'ar esamant

Evit lacat da gorf ha da speret en tourmant.

Ar c'horf incessamant a lavare :
 Pa eo qer ber amzer ar vue ,
 Pe joa ta, Augustin, dalc'h mat da vignonet ,
 Ar brava pinijen eo plijadur ar bed ;
 Neuze ne vouien penos ober ,
 Mes chom a ren bepret dindan grifou Lucifer.

Va c'halon beuzet gant ar chagrin ,
 Amezec em bue libertin ,
 A lies e laren : varc'hoas me gomanço
 Da renons da Satan ha d'ar vaniteou ;
 Mes perac qer varc'hoas diferi ?
 Hac en a esetay va chadennou da derri ?

Pa voan var ar poent d'en em renta ,
 Car ne rep pelloc'h nemet gouela ,
 E clêvis laret din : qemer, qemer, ha len ;
 Pa zigoris al leor e qevis eur bajen
 Var beini e lennis va goal stat ,
 Neuse e chanchas a gren va c'halon evit mat.

Consider , peche'r ha pec'heres ,
 An nerz, an douster, ar vadeles
 Deus ar graçou divin o picat va c'halon ,
 Livret d'an drouc-speret evit pales a tron ;
 Ne voa nemet graç Doue capabl
 Da denna va ene deus eur stat qer miserabl.

Ar c'hiq, ar bed hac an drouc-speret

O devoa qement va goneet,
 Brein e voan gant ar viç bete mel va esqern,
 Prest e voan da gouca en creis puns an ifern,
 Pa deuas ar mest eus an oll galonou
 Da drec'hi va c'halon goude cals ataqou.

Qerqent a ma chanchis a vue,
 E qevis gant joa va mest neve;
 Neuse oll ravisset, gant joa e lavaren:
 Diveat o caran o guenet ancien,
 Ia, guir eo hac ep mes en e laran:
 Guenet bepret neve, re diveat o caran.

Me sante gand cals a blijadur
 Em c'halon eun tan dreist an natur,
 Tan mignon gant Doue dre e c'hraç alumet
 Evit va excita muioc'h-mui de garet;
 Neuse pa na jujere nemetan,
 E cresque de ha nos va c'harante evitan.

Goelet e c'heus; pec'her aheurtet,
 Ebars em etat da vir bortret;
 Mar deu Jesus hirie da rei dit e c'hraçou,
 Na lavar qet eveldon: varc'hoas, varc'hoas, otru;
 Mes diles da grimou prontamant,
 Gallout a elles quea en ifern eni peb istant.

Len alies gant humilite
 A leor sacr eus al lezen neve,
 Ennan te a gavò sclêrijen da speret,
 Ha da galon daerou da voela da pec'het;

Enna e velo da zaoulagad
 Ar pez a gomand dit Doue da vest ha da dad.

En peb feçon e meus difennet
 An Ilis eus an heretiqet,
 Dre scrijou, dre gomzou, dre sarmoniou nerzus;
 Divoal da gayet commers gant tud qen danjerus,
 Divoal, ha divoal pis eus an escumunugen,
 Da ene eo ar branc hac an Ilis a veen.

Qeit a ma chomis var an douar,
 Ne meus bevet nemet er glac'har
 Da vea ofancet un Doue qen emabl;
 Va breur, evit bea penitaut veritabl,
 Eo ret dit er binijen mervel
 Diadan poan da vea tolet en tan eternal.

Dan oll emeus lavaret a voues scter,
 Penos e voan ar brassa pec'her;
 Guir hent ar barados eo an humilite,
 Bete fin da desiou cren rac ar vanite,
 Rac eur moment qent antren er gloar
 E hel ar vanite ober dit col ar victoar.

Sonch alies en calon Jesus,
 Calon poaniet ha carantesus;
 Be fidel de garet ha da soufr evitan,
 Rac en en deus souffret evidout da genta,
 Be sonch penos calon eur c'hristen
 A die bea eur galon a binijen.

FIN.

CANTIQ

VAR HANO JESUS.

Var an ton anavezet.

Oc'h Hano sacr, ô va Jesus!
 Pehini so qer gracios,
 Ra vezo va oll esperanç,
 Hac e pep peril, va fizianç.

Ra vezo va oll joausdet,
 Qeit ha ma vezin var ar bed,
 Prononç an Hano beniget
 Eus a Jesus, Salver ar bed.

Va Jesus, ne zesiràn qen
 Nemet disqi ar guir veyen
 Da servicha ho Majeste
 Qeit a ma vezin en bue.

O va Zalver! ô va Jesus!
 C'houi eo va zensor precius;
 C'houi eo, Jesus, va guir Roue,
 Va difennit bemnos ha de.

Oc'h Hano precius ha santel
 Zo, d'am ginou qer douç ha mel;

Ur joa bras ameus o clêvet
Prononç oc'h Hano beniget.

Ra vo Jesus incessamant
Em memoar, em ententamant;
Ne fel din caret netra qen.
Nemet Jesus da virviquen.

Pa ho quelàn, ô va Zalver!
Er Sacramant eus an Oter,
Dre an daoulagad eus ar Fe
Emeus ur joa bras em epe.

Oc'h Hano sacr, ô va Jesus!
Dreist peb hano a so eurus,
Da nep er prononç a galon,
Gant respect ha devotion,

Evit raquita an oll bed,
Ar maro oc'h eus anduret;
Na bermettet eve collet
Ar pris eus ho Coat beniget.

Me o suppli, ô va Jesus!
Dre oc'h Hano carantezus,
Pa sortiin eus ar bed-man,
Assistit var va zremenvan.

FIN.



E MONTROZIER, eus a Imprimeri LEDAN.